



## KIMIAD

EUR

# ZOUDARD YAOUANK

Var ton : *Al labourer.*

Va c'halou a zo fraillhet dre nerz ma enkrezoù,  
 Va daoulagad enlanet n'ho deuz mui a zaelou;  
 Deul eo siouaz ann devez ma renkân ditezal!  
 Lec'h kaer ma bugaleac'h, ma bro douç Breis-Izel.

Keno! d'id ma zi balân, kuzet bars ann draonien,  
 Tachen glaz var he-hini, bugel, e c'hoarion;  
 Gwez ivin ker bodennek, en disheol d'euz pe-re  
 E pad tomder ann anvou, e kousken da greis-de.

Keno! keno! mamm a tad, brema n'esperit ma!  
 E chomfe ho mab karet vit harpân ho kozui,  
 Evit gouñid dec'h bars, 'vel m'oh peuz gret dezhoñ,  
 All lezenn zo didroez ho kuitaad a renkân

N'ag a vech, va mamm dener, a renkfet-hu le va;  
 Pa zeui ma c'hi ankenet en dro dec'h da ruza;  
 Pa welfet, bars ann oaled, va skabellik goullo,  
 Ag ar c'hissind o steui deuz ma fenn-baz dero.

Keno bered ar barros, douaron consacret,  
 Pere a guz va c'herent gant ar Zalver galvet;  
 Da wél ann Anaon clemus nin mui war ho peziou  
 Da scuilla dour biniguet mesket gant va daelou.

Keno va muia caret, ma dousik coant Mari,  
 Eur blanedenn diegar a deu d'omm glac'hari;  
 Evruzded a levenez skenduz zo tremenet  
 Vel en oabr, ar goumoulen gant ann avel cassel.

'Na welin mui da lagad ker lemm a ker laouen  
 Ho wirvi gant plijadur, enn li pa erruen,  
 Da zornik wann ker mibin o trei ar c'harr en dro,  
 Da wouez flour mui n'a glevin o cana va gwerzo.

Pa oamp er c'hatekismou, omm daou c'hoas bugale,  
 Or c'halonou diskiant, en kuz ha n'em gleva,  
 Dirag Gwerc'hes ar c'hroazhend, nag a vech he touezomp  
 N'a erru-je birvikenn, disparti en tre-zomp.

— 8 —

Yaouanc a dibreder, sionas n'e wiemp-ket  
Nag a bed c'hwartentez er vuez zo mesket ;  
Evid-omm n'e oa, neuze, lezennou 'na Roue  
N'anveemp mert eul lezenn, hiñl ar garante.

Keno va nes amezek, Yannik va gair mignon,  
Kamarad va c'hoariou, va breur dre ar galon,  
Piou a gemero bremâ, eul lod euz ma foanio ?  
Pion a gomzo ganeme deuz ar ger ag ar vrô ?

Ep-hon te ielo breman, er parosjou tosta,  
Da bigosat all leuriou bars el lasou-dorna ;  
Ep-hon te iel da c'houid maout ar c'hourennadec ;  
Da jaicha var rubannou ebars ar varadec.

Keno va c'hazek melen, skân evel eunn eïës,  
Mistr evel eul logoden, gentil 'vel eunn oanès,  
N'ed'sentin ken indann-hon, gant ann hast, o trippâl  
Ma daouarn mui n'e stagfont ar zeien war da dâl.

Keno, ma c'hihès *Mindu*, ma leal camarad,  
N'effomp ken, dre ar glizen, da glask roudou ar c'had ;  
N'e glevin ken, er mene, da chilpadenn skiltrus,  
War ma doru mui n'e zentiu da deod garantézus.

Abenn eunn nebend amzer, cals a vignonet ien  
Bars er zoudard divroët, ep mar, ne sonjfont ken ;  
Mès da galon te, *Mindu*, n'eo ket ken ankoezus.  
Pell he ri c'hoas va c'havou dre da lezou clemmus.

Keno ta plijadurion, leuriou nevez, festou,  
Rentadeg-neud noz-vezou, foariou a pardonniou,  
Ebatton ker birvidic, binion sard a sklentiu  
N'a drido mui va c'halon gant da zonion lirzin.

Keno kement a garan, keno da virviken !  
Pell deuz a Vreis me varvo, mantret gant ann ankenn,  
'Vel eur blantenn kizidic, evit ar vrô crouët,  
A reak gwenvi a mervel, kerkeat, m'he divroët.

